

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

=====

K A I E R N° IX

Miz Here 1970

Suliu ordinal 28 - 29 - 30.

Troidigez aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 2 a viz Here 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

28e SUL ORDINAL (11 Here 1970)

Lennadenn Ia. - Talvoudegez ar Furnez, n'eus netra par dezi e-touez
madou ar bed-mañ.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ (7/7-11)

7. Pedet am eus, ha skiant 'zo bet roet din;
aspedet am eus, hag ar spered a 'furnez a zo deut ennon.
8. Ar 'furnez am eus prizet muioh eged rouantelez ha kador-roue,
ha lakeet am eus em spered n'eo ar binvidigez netra en he hichen.
9. Ne welan mên presiuze ebed da lakaad e-skoaz ganti;
oll aour ar bed n'eo en he hichen nemed eun nebeudig trêz,
hag an arhant n'e-no ket dirazi muioh a briz eged ar fank (pe: ar pri).
10. Dreist ar yehed hag ar gened eo bet plijet d'am halon;
kentoh eged sklerijenn an heol, am eus bet c'hoant d'he haoud,
hi ha ne varv ket ar sked anezi.
11. Ha setu eo deuet din an oll vadou war-eun-dro ganti:
leun e oa he daouarn a binvidigeziou diniver.

SALM 89 - Gwelit er bajenn war-lerh. Evid kaoud eun diskan war al levrig
"An Overenn", e heller kinnig pe "Warzu ennoh", p.38, pe er bajenn
57, diskan ar Salm 84 (mentad 4 x 8) pe an eil euz S. 129.(4 x 6).

SALM 89 / 12-13, 14-15, 16-17

Diskan; Kargit or halonou, Aotrou Doue,
gand ho madeleziou, ma vim laouen ganto.

12. Deskit deom, Aotrou, pegen berre eo deiziou or buez,
ma kavim furnez ar galon.
13. Troit adarre da zelled ouzom, Aotrou: a-benn peur eta?
Kemerit truez ouz ho servicherien.
14. Kargit or halonou gand ho madelez kerkent ha goulou-deiz,
deom da dridal gand levenez 'hed an deiz.
15. Roit ho frealz deom ken liez devez ha m'ho peus kastizet ahanom,
ken liez bloavez m'on eus gouzañvet poaniou.
16. Ra vo gwelet an oberou gallouduz a rit evid ho servicherien,
hag ho kloar war o bugale.
17. Ra ziskenno warnom madelez an Aotrou, on Doue!
Grit da labouriou on daouarn dougen frouez paduz.

Eil Lennadenn. - Setu amañ eur gentel verr diwarbenn an nerz

hag ar vuez a zo gand komz an Aotrou Doue.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (4/12-13)

12. Leun a vuez eo komz Doue, leun a nerz,
lemmoh eged eur hleze a droh euz an daou du;
mond a ra don e diabarz an dén, beteg an disparti etre spered hag ene,
etre mellou an izili ha mél an eskern.

13. N'eus tra krouet ebed hag a vefe kuzet outañ;
rag peb tra 'zo e-noaz ha dizolo dirag e zaoulagad,
ha dezañ on eus da renta kont.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (10/17-30)

17. Eun deiz, p'edo Jezuz o vond en hent,
e teu unan (pe: eun dén) d'e gaoud en eur redeg;
daoulinet dirazan, e houlenñ outañ:
"Mestr mad, petra 'm eus da ober evid gounid ar vuez peurbaduz?"
18. Jezuz a lavar dezañ: "Perag e lavarez "mad" din?
Dén ebed n'eo mad, nemed Doue hebken.
19. Anaoud a rez ar gourhemennou:
ne lazi ket, ne ri ket avoultriez, ne laeri ket,
ne lavari ket fals-testeni, ne ri gaou ouz den,
da dad ha da vamm a enori."
20. Egile a respont dezañ: "Mestr, kement-se am eus mired
adal (pe: abaoa) va yaouankiz."
21. Jezuz, o veza paret e zell warnañ, e-neus e garet, hag e lavar dezañ:
"Eun dra a ra diouer dit c'hoaz:
Kerz da werza da oll vadou, ro anezo d'ar beorien,
hag ez po eun teñzor en neñv; ha neuze, deus d'am heul."
22. Teñvalleet e benn o kleved kement-se,
hennez a ya kuit, glaharet e galon.
23. Jezuz, neuze, a daol e zellou tro-dro dezañ,
hag a lavar d'e ziskibien: "Pegen diêz e vo
d'ar re o deus madou antreal e rouantelez Doue!"

24. An diskibien a jom sebezet gand e gomzou,
ha Jezuz a lavar dezo startoh c'hoaz:
"Ya, va bugale, pegen diêz eo antreal e rouantelez Doue"
25. Esoh eo d'eur hañval tremen dre doull (pe: dre graouenn) an nadoz,
eged d'eun den pinvidig antreal e rouantelez Doue."
26. Sebezet muioh-mui, an diskibien a houlenn an eil ouz egile:
"Piou 'ta, neuze, a hell beza salvet?"
27. Jezuz, o veza paret e zell warno, a lavar dezo:
"Evid an dud, ez eo dreist o galloud, evid Doue n'eo ket;
rag Doue a hell peb tra!"(pe: n'eus netra ouspenn da Zoue.)
----- Ar peurrest a hell beza krennet.-----
.....
28. Pèr, neuze, a zav e vouez da lavared dezañ:
"Setu on eus-ni kuiteet peb tra, hag om eet d'ho heul."
29. Ha Jezuz da respont: "E gwirionez, m'hen lavar deoh,
H'eus den ebed, kuiteet gantañ eun ti, breudeur, c'hoarezed,
tad, mamm, bugale, parkeier, ablamour din ha d'an Aviel,
30. ha ne resevo ket, dija er vuez-mañ, kant gwech peadra da dalvoud
tiez, breudeur, c'hoarezed, mammou, bugale ha parkeier,
gand heskinou (pe: gwallgasou) ouspenn,
hag er bed da zond, ar vuez peurbaduz."

OREZONOU evid an 28e SUL

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Emaom ouz ho pedi, Aotrou Doue: ra zeuio deom ho kras
dalhmad araog ha da heul peb ober,
ma vim douget ganti bepred d'an oberou mad.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,*
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer pedennou ho tud fidel
war-eun-dro gand provadenn ar zakrifikis:
evid ma talvezo deom an overenn heuliet gand gwir devosion
da erruoud eun deiz e gloar ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan (pe: asamblez)...

Aotrou Doue, uhel dreist peb tra, c'hwi a bedom hag a aspedom:
evel ma vagit ahanom gand Korv ha Gwad santel Or Zalver,
grit deom ive kaoud perz en e vuez-Doue.
Eñ on Doue beo ha leun a hloar, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

Testenn latin ar gempedenn, evid ar re a gar keñveria:

Tua nos, quaesumus, Domine, gratia semper et praeveniat et sequatur,
ac bonis operibus jugiter praestet esse intentos.

29e SUL ORDINAL / (18 Here 1970)

Lennadenn Ia. - "Servicher an Aotrou Doue", setu an ano
roet d'ar Zalver e levr ar profed. Dre ar boan
eo e hounezo ar zilvidigez evid an dud.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZALIAZ (53/10-11)

10. An Aotrou Doue 'zo bet plijet gantañ gwaska e zervicher dindan ar boan.
Goude m'e-no kinniget e vuez da zakrifis evid ar pehed,
e welo al lignez savet diwarnañ,
hag e-no deiziou hir da veva;
dre e zorn e vo kaset da benn bolontez an Aotrou.
11. En distro d'e boaniou, e welo ar sklerijenn,
ha madou e-no e walh.
Ablamour m'e-neus anavezet petra eo gouzañv,
va zervicher, den santel ma'z eus unan,
a lako an oll dud e stad da blijoud din,
hag a gemero warnañ ar zamm euz o fehejou.

SALM 32 /4-5, 18-19, 20-21 - Diskan: (gwerzad 22)

..... Ho trugarez warnom, Aotrou (Doue),
evel m'on eus-ni fizians ennoh.
pe evel d'ar zul araog (gwelit p.1)

4. An Aotrou Doue 'zo leal e lavar,
en e oll oberou eo fidel d'e hér (pe: d'e bromesa).
5. Plijoud a ra dezañ beza reiz ha just,
gand madelez an Aotrou eo leun an douar a-bez.

18. An Aotrou a bar e lagad war an dud a zouj anezañ,
war an dud a esper en e vadelez,
- 19 evid savetei o buez euz an ankou, ha rei bevand dezo pa vez naonegez.
20. Emañ on ene leun a fizians en Aotrou: or skoazell hag on divenn eo.
21. Ennañ e kav or halon al levenez; en e ano santel on eus fizians bepred.

Eil Lennadenn.- Jezuz Krist, ar beleg n'eus nemetañ, leun a
drugarez evid an dud, pa oar petra eo gouzanv.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (4/14-16)

14. Jezuz, Mab Doue, a zo evidom ar beleg heb par, erruet dija en neñvou;
dalhom stard eta da ziskleria or feiz.
15. Rag ar beleg on eus n'eo ket unan ha n'hell ket kemer perz en or poaniou;
er kontrol, bez' e-neus bet da houzañv e peb doare,
pegwir e oa heñvel ouzom e kement tra, nemed ar pehed.
16. Deom eta gand fizians asur beteg tron an Tad madelezuz,
evid kaoud ar pardon dre e drugarez
ha gras e skoazell beb gwech ma vo ezomm.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia!...

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (10/35-45, pe 42-45 hebkén)

35. En amzer-se, daou euz an ebestel, Jakez ha Yann, mibien da Zebede,
a dosta da gaoud Jezuz, hag a lavar dezañ:
"Mestr, ni 'fell deom e rofeh deom ar pez on eus da houlenn."
36. Respont a ra dezo: "Ha petra 'fell deoh e rafen evidoh?"
37. — Grit, emezo, ma vim laket d'azeza, unan en tu deou,
egile en tu kleiz deoh en ho kloar."

38. Jezuz, avad, a lavar dezo: "N'ouzoh ket petra 'houlennit.

Ha gouest oh da eva ar halirad am eus-me da eva,
pe da reseo ar vadiziant am eus-me da gaoud?"

39. Respont a reont: "Ya, gouest om."

Jezuz, neuze, a lavar dezo: "Gwir eo, ar halirad am eus da eva ho po
da eva ive, hag ar vadiziant am eus da gaoud e viot badezet enni.

40. Evelato, azeza en tu deou pe en tu kleiz din,

n'eo ket din-me hen rei deoh,

bez' ez eo evid ar re m'eo miret ar plasou-se evito."

41. An deg abostol all, o veza klevet ar gaoz,

a ya droug enno ouz Jakez ha Yann.

42. Jezuz a halv anezo d'e gaoud, hag a lavar dezo:

----- Ar pennad diverret a grog amañ, evelhénn: -----

42. Jezuz, eun deiz, e-neus galvet e ziskibien d'e gaoud, evid lavared dezo:

"Her gouzoud a rit, ar re a weler e penn ar poblou a ra o mistri warno,
hag ar pennoù braz a lak o galloud da boueza.

43. Ganeoh-hwi ne dle ket beza evelse;

er hontrol, an neb e-no c'hoant dond da veza braz

a vo servicher ganeoh,

44. hag an neb e-no c'hoant beza ar henta a vo mevel d'an oll.

45. Rag Mab an den e-unan n'eo ket deut evid beza servichet,

med evid servicha ha rei e vuez da brena an oll dud."

KEMPEDENN.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, roit deom ar hras
da ouestla deoh or bolontez bepred,
ha da zervij ho kloar gand eur galon leal.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma kinnigim deoh a wir galon
ar provou-mañ on eus bet diganeoh;
pa n'eus nemed ho kras evid or gwalhi euz ar pehed,
ra vim santelleet dre vister sakr an aoter, a gemerom perz ennañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom, Aotrou Doue: grit deom tenna or mad
euz teñzor traou an neñv a dostaom outo en overenn,
evid ma kavim er bed-mañ skoazell ho krasou,
ha ma vim heñchet warzu an eürusted peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

***** Testenn latin ar gempedenn *****

Omnipotens sempiterne Deus, fac nos tibi semper et devotam gerere voluntatem,
et majestati tuae sincero corde servire.

30e SUL ORDINAL (25 Here 1970)

Lennadenn Ia.- Ar profed a ro kelou euz distro laouen
bugale divroet pobl Israel.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (31/7-9)

7. Evelhénn e komz an Aotrou Doue:

"Taolit a-bouez-penn kanou laouen diwarbenn Jakob,
savit enor d'ar bobl a zo e penn kenta ar broadou,
sonit ha kanit meuleudiou, en eur lavared:
"Saveteet e-neus an Aotrou e bobl, ar restad euz Israel."

8. Emaon o tigas anezo d'ar gêr euz bro an hanter-noz,
o dastum a ran euz pennou pella ar bed.

En o zouez emañ ah hini dall koulz hag an hini kamm,
ar vaouez o tougen hag ar vamm nevez-ganet he bugel;
eun engroez vraz a dud a zo tond en-dro.

9. En eur vond kuit e oa an dour en o daoulagad,
er frealzidigez e tigas anezo d'ar gêr.

Mond a rin en o 'fenn da gas anezo d'an dour-red,
dre eun hent kompez, kuit a baka lamm.

Rag eun tad on evid Israel, hag Efraïm eo va mab kenta-ganet.

SALM 125 - El levrig "An Overenn", n'eus diskan da vond mad amañ nemed
an eil poz euz "M'hoh ador...", p. 34, pe "Karantez vraz", p. 57.

Diskan: Traou kaer 'n-eus grêt Doue 'vidom,
E barr al levenez emao.

1. P'e-neus an Aotrou digaset d'ar gêr tud divroet Sion,
e oa evidom evel eun huñvre.
- 2ab. C'hoarz laouen ganeom leir or ginou, ha kanaouennou war or muzellou.
- 2cd. Neuze e lavare tud ar broiou payan:
"Ken kaër traou e-neus grêt an Aotrou evito!"
3. Ya, ken kaer traou e-noa grêt an Aotrou evidom,
hag edom e barr al levenez.
4. Digasit d'ar gêr, Aotrou, on tud prizoniet,
evel froudou dour en dezerd.
5. Ar re a hade en eur skuill daelou, a ray an eost en eur gana.
6. Mond ha dond a reent en eur ouela, pa daolent an had en douar;
dond a reont en-dro en eur dridal laouen,
pa zougont o drammou-ed a-vriadou.

Eil Lennadenn.- En amzeriou kenta ar relijion gristen, e oa dao
displega mad, d'ar re o doa heuliet Lezenn Moizez,
pebez kemm a zo etre beleien al lezenn-se hag ar
beleg-meur anvet ha kaset gand Doue: Jezuz Krist.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (5/1-6)

1. Eur beleg-meur a vez atao kemeret euz a-douez an dud,
ha karget da ober evid an dud kement a zell ouz o dârempredou gand Doue;
dezañ eo da ginnig provou ha sakrifisou evid ar pehejou.
2. Gouest eo da veza trugarezuz ouz an dud a ra pehejou dre ma n'ouzont ket
pe dre ma 'z int diheñchet,
pegwir e kav sempladurez ennañ e-unan;

3. hag ablamour da-ze, e rank, koulz evitañ hag evid ar bobl,
kinnig sakrifisou evid ar pehejou.
4. A-hend-all, ne gemer ket eun dén an enor-se evitañ e-unan,
med bez' e ranker beza galvet gand Doue, evel ma oa bet Aaron.
5. Evelse ivez, an Aotrou Krist, evid dond da veza beleg-meur,
n'e-neus ket kemeret an enor-se anezañ e-unan:
roet eo bet dezañ gand Doue, an hini e-neus lavaret dezañ:
"C'hwil 'zo va Mab, diwarnon oh ganet hirio."
6. hag a lavar c'hoaz e leh all:
"C'hwil zo beleg da viken, hervez doare Melkisedeg."

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK.- (10/46-52)

46. En amzer-se, edo Jezuz o tond er-mêz euz kêr Jeriko,
e ziskibien ouz e heul, gand eur boblad stank a dud.
E kostez an hent, e oa azezet mab Time, Bar-Time,
eun den dall o houlenn aluzenn.
47. P'e-neus klevet emañ aze Jezuz a Nazared,
e stag da hopal (pe: da grial a-bouez-penn):
"Mab David, Jezuz, ho pet truez ouzin!"
48. Kalz tud a ra gourdrouz dezañ (pe: a foll warnañ)
evid e lakaad da rei peoh;
padal, (pe: med) eñ ne ree nemed sevel ukelloh e vouez:
"Mab David, ho pet truez ouzin!"
49. O veza chomet a-zav, Jezuz a lavar: "Galvit anezañ da zond."
Setu an dud a halv an hini dall, en eur lavared:
"Kemer fizians, sav, galvet out gantañ."
50. An den a daol kuit e vantell, hag en eul lamm e teu da gaoud Jezuz.

51. Jezuz a houlenn outañ: "Petra fell dit e rafen evidout?"
— Rabbouni, emezañ, grit din gweled."
52. Jezuz, neuze, a lavar dezañ: "Kê! gand da 'feiz out salvet."
Raktal e kav en-dro ar gweled,
hag ez a da heul Jezuz war an hent.

OREZONOU evid an tregondved Sul

KEMPEDENN.— Pedom Doue...— Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
kreskit ennom ar feiz, an esperans hag ar garantez;
hag, evid ma hellim kaoud ar pezh a brometit,
grit deom kaoud evidoh karantez awalh
evid heulia a-zevri ho kourhemennou.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.— Amen.

WAR AR PROVOU.— Plijet ganeoh, Aotrou Doue, taoler eur zell a vadelez
war ar provou a ginnigom deoh amañ;
ar zakrifis lidet ganeom, ho servicherien, ra dalvezo
dreist peb tra evid enor ho kloar. Dre J.K., or Zalver.

GOUDE KOMUNIA.— Pedom asamblez...— Emaom ouz ho pedi c'hoaz, Aotrou Doue:
ra labouro ennom, 'hed or buez, vertuz an overenn hag ar gomunion;
ar pezh a lidom bremañ dindan spesou ar zakramant,
grit ma welim anezañ, eun deiz, dizolo e splannder an neñv.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. — Amen.
